

— Da belec’h ’maoc’h ’vont, Naig? Amzer zo da c’hoari c’hoazh. N’eo ket poent deomp c’hoazh mont da zebriñ merenn!

Setu aze ar c’homzoù he doa Emili Nedeleg distaget ouzh Naig ar Prad, plac’hedigoù seizh vloaz ma oant, int o-div, ha kenitervezed ouzhpenn. Met aet e oa komzoù Emili da goll e toull an avel. N’he doa ket memes Naig distroet he fenn. Kuit ez ae. Bep taol e veze e-giz-se ganti, bep taol ma tremene war skramm he spered skeudenn he zad. Aloubet e veze neuze kalon ar plac’hig gant un hiraezh dilavarus, hag e kreske enni ar c’hoant da vezañ hec’h-unanig. Setu abalamour da betra e fellas da Naig en em dennañ kuit deus ar vandennad a vugale ma oa-hi o c’hoari en o zouez, e traoñ an aod, ar mintin-se a viz Mae 1916.

Un devezh Yaou e oa. Hag e-giz da bep Yaou, hag a oa gwechall an devezh merket d’ar vugale-skol da vont da redek o reuz, e veze Naig o c’haloupat war gerreg gwenn oufig Porzh-Karwenn, gant holl vugale karter ar Beg, eus porzh-mor Lechiagad, er Vro-Vigoudenn.

D’ar mare ma komzomp diwarnañ, da lavarout eo e penn-kentañ an ugentvet kantved, ne oa ken deus Lechiagad nemet ur gêriadennig pesketaerien, stag deus kumun Triagad hag a zo houmañ hec’h iliz-parrez, gouestlet da Sant Riagad, diazezet war an uhel ha war ar maez, e-kreiz ur vourc’hig, ul lev vale pe dost deus an aod vras. E-harz iliz Triagad ne vez ket klevet tonigenn ar mor, met sourradenn an avelioù kentoc’h, pa vez ar re-mañ o c’hoari, dre gaerig, e laezioù gwez bras koad an Aotrou Le Gouvello de la Porte.

Hemañ a sav porched e vaner, e-kreiz ar vourc'h vihan-se, war gostez dehou ur blasenn ma oa warni iliz kozh Sant Riagad, gant ar vered en-dro dezhi, gwechall. Aet an iliz kozh da get. Savet un iliz nevez, en tu-mañ deus ar blasenn, hed-ha-hed an hent.

Da vare bugaleaj Naig, e veve Treff Sant Riagad diwar labour he c'houerien, ha n'eo ket teil-aod a rae diouer dezho da fuilhañ war o farkeier, mesk-ha-mesk gant teil-saout, a-benn gounit avaloù-douar prim. Kêriadenn Lechiagad, hi, tolpet tro-dro d'ur chapel gozh, eus an trizekvet kantved, gouestlet da Sant Jakez ha diskaret dibaoe siwazh d'ar sant, a veve didrouz diwar labour he fesketaerien. Boazet e oa Lechiagad, ouzhpenn, da genlodañ he flanedenn ha buhez he martoloded gant ur gêriadenn all, ar Gelveneg anezhi, dre m'emañ an div gêriadenn besketaerien-se diazezet, tal-ha-tal, war bep a gostez eus ur vrec'henn-vor digor war an Atlantel meur, en arvor vigoudenn.

Ha d'ar Yaou-se a viz Mae 1916, e tregerne, ur vouzarenn anezhi, aodig Porzh-Karwenn e Lechiagad gant botoù-koad, ha tachou dindano mar plij, bandennadoù bev-buhezek bugaligoù karter ar Beg. Cholori ar mil gurun a vage ar re-mañ, o huchal, o redek, o lammat war ar pladennoù roc'h rust ha kalet, e laez an aod, pe c'hoazh izeloc'h, tro-dro d'ar poullou-dour, o vezañ ma oa ar mor o trec'hiñ. Kement a reuz a oa gant mousetaj ar c'harter, m'o doa ranket gouelini an aod mont, evel boaz, da gludañ, faeüs-tre, war ar c'herreg a save, e traoñ pellañ ar prad bezhin rous, o c'hein kromm a-rez d'an dour.

Ha ne veze ket, e c'hell deoc'h bezañ sur, Naig ar Prad an hini ziwezhañ o kas ar jabadao en-dro, ar plac'hig drant anezhi. O fringal e veze-hi bep mintin diwar he joa vevañ, e brud seizhvet bloavezh he bugaleaj. A-vec'h m'he deve he mamm echuet kempenn tresenn ar plac'h, war-dro nav eur diouzh ar mintin, da vareoù ehan-skol, ma tilamme Naig diouzh he zi. Hag hi neuze, tizh warni, mont da glask penn deus bugale all he c'harter a-oad ganti. Ar plac'hig he c'hoarzh sklintin hag he daoulagad bliv a veze graet deus outi gant

holl dud ar familh ha gant an amezeien. Ha n'eo ket teod a vanke dezhi! Prest da doullañ kaoz atav, ha chichant-tre ouzhpenn, gant n'eus forzh piv bennak a c'hellfe en em gavout ganti. Ur plac'hig agreapl, e-giz ma lavare du-mañ ar re vras deus outi. Met arabat krediñ, diwar-se, e ouie Naig ar Prad filañ gant ar vugale all, pell ac'halese. Gwad prim a lamme dindan hec'h ivinoù, hag ur spered youlek eo a laboure en he c'horf nerzhus, re bar da gorf levn ha gwevn ur gurzenn. Pa gave tu da begañ, ne ziskroge ket.

Abaoe un toullad mizioù, koulskoude, e veze dalc'het spered Naig, bep ar mare, gant soñjennoù melkonius. Soñj he zad a zeue dezhi hag a vroude he diabarzh. Tost da zaou vloaz zo e oa aet an tad kuit, da heul ar wazed all en oad da dennañ gant ar fuzuilh, goude ma oa bet klevet kloc'h an tangwall d'an dri a viz Eost 1914. Savet e oa brezel etre ar C'hallaoued hag an Alamaned, ar Brusianed evel ma lavare tad-kozh Naig, Jañ-Mari ar Prad: ar Pradig kozh a veze graet deus outañ. Dalc'het en doa hemañ soñj deus ar brezel all, ar brezel kozh, ma oa bet darbet dezhañ bezañ paket ennañ, ouzhpenn daou-ugent vloaz a-gentoc'h, er bloavezh 1870. Boazet e oa ar Pradig kozh da zisklêriañ e soñj war dachenn ar politikerezh, hag hini ar brezelioù dreist-holl, pa veze bodet ar familh en-dro dezhañ, da vare ar beilhadegoù, e-tal an tan goude koan. Bewech e teue e gomz gantañ evel-henn.

“Ar Brusianed, me lâr deoc'h, n'int ket hanter tud anezho, ha, war dachenn ar brezel, n'eus ket deus outo kranked gwak kennebeut, diaouled ne lâran ket. Arabat disoñjal e oa bet deuet ar Brusianed, iset gant Bismarck, a-benn da blantañ ar yenn gant Napoleon III, e kêr Sedan, ar bloavezh 1870; ha goude, gant o fezhioù-kanol o tisonkañ dir ha tan, o doa lakaet seziz war kêr-gabital Bro-Frañs, er bloavezh 1871. Ur gwall daol e oa bet hennezh evit an Impalaer Napoleon III, ar Bonaparte bihan e-giz ma lâre lod tud deus outañ, ma rankas hemañ reiñ e zilez peogwir en doa kollet, war un dro, e vrud hag e gurunenn, Bro-Frañs, hi, a oa bet troc'het deus outi Bro-Alzas ha Bro-Loren.”

Bep taol e selaoue Naig, gant evezh bras, dezrevelloù an tad-kozh. Gouzout a ouie hemañ dibunañ koñchennoù d’e vugale-vihan. Un den habask a oa deus outañ. Ne glaske-eñ trouz deus den ebet. Evelato, pa’z ae ar gaoz war ar politikerezh, neuze ’vat, e teue ar Pradig da vezañ ur republikan touet. Komprenit e veze techetoc’h an den da zoujañ da vanniell triv ar Republik eget da vannielloù an iliz-parrez, el lec’h na veze ket gwelet e benn da Sul. Ne vire ket, evit-se, e santimantoù politikel outañ da gemer perzh, ur wech ar bloaz, da viz Mae, e lidoù Sul-bennigañ ar mor. Ur gouel-berz evit ar vartoloded eo a oa, da neuze, eus gouelioù Sul-bennigañ ar mor, ul lid sakr bet degaset er vro, war-dro ar bloavezhioù triwec’h kant ha pevar-ugent, gant an Ao. Koatodon a oa da neuze person ar Gelveneg. Da geñver al lidoù-se eo e veze gwelet ar merc’hed, gwisket kran, hag ar wazed war o dilhad cheuc’h o pignat e bourzh ar bagoù-dre-lien, ganto bannielloù, kroaz aour ha tout, hag o vont d’ober, da heul bag ar veleien, tro ar porzh hag ar reier bras: Maen-Krenn, Faoutez, Klezer, Maen-Brini, ha da vont goude-se betek beg Maen-Meur hag, a-wechoù, war-du Karreg-Hir, a-benn bennigañ ar mor ma tenne familhoù pesketaerien an div gêriadenn o bara pemdeziek dioutañ.

Setu bep bloaz, da geñver gouelioù Sul-bennigañ ar mor, e veze ivez ar Pradig gant e ganod, keit ha ma oa war ar vicher martolod, e-touez ambrougadeg ar bagoù all o prosesionañ war an dourioù sall rak, petra bennak ma ne dorre ket e sec’hed gant dour benniget, ne oa ket da vezañ lakaet da zebrell beleien evit-se. Graet o doa e holl vugale, pevar baotr ha div blac’h, o fask kentañ. En oferenn-bred, hag er gousperoù, e veze e wreg bep Sul e-barzh iliz Sant Riagad. Ha pa zeue bep bloaz ar mare d’an Aotrou person d’ober tro kêriadenn Lechiagad, e lavare an tad-kozh Jañ-Mari d’e wreg Ivona.

— Klevit ’ta, Ivona. Pa oan bet dec’h o kerc’hat dour gant an doukenn da feunteun Kerleger, e oa du-hont tud hag a lâre e teufe person Triagad hag ar fabrik, ar sizhun a zeu, gant ar marc’h hag ar

charibañ, d'ober o zro e-touez familhoù ar Beg. Aet e vin-me d'ar mor. Arabat deoc'h disoñjal am eus prenet ur voutailhad gwin gwenn. A-dreñv ar ridoch, dindan an dirioù eo am eus kuzhet anezhi, 'barzh kichen ar c'hestad korned-sall. Pa vo bet riñset o banne ganto, hag a-barzh na vo aet ar fabrik er-maez en-dro d'ober war-dro ar marc'h hag ar charibañ, c'hwi 'roio d'ar person gwerzh un oferenn pe ziv, 'giz ma vez bep bloaz ar pleg ganeoc'h ober. Bez' e rank an holl bevañ c'hwi 'oar, ar veleien e-giz ar re all. Arabat e ve deomp bezañ lakaet da skrañgnigeu vil gant an dud, pe graet deus outon ur poch-kras e-giz ma ouie lâret gwechall ma c'hamalad amzer-soudard, Loeiz Miniou, deus kostez Skaer.

Setu ma oa aze e zoare, d'ar Pradig, da lakaat an traoù da vont plaen etre e goustiañs republikan, diouzh un tu, ha gourc'hemennoù an Iliz, diouzh un tu all. Diwar e vuhez martolod e oa deuet furnez dezhañ. Klevet e veze c'hoazh, hag eñ deuet war an oad, o tisklêriañ evit klozañ war e brederiadennoù politikel.

— Gouzout a rit mat, n'eus den ebet hag a ve mestr nemetañ war e blanedenn, met n'eus droug ebet ha ne selvich ket da vad ivez. Me zo 'vont da lâret deoc'h un dra, evidoc'h da zerc'hel soñj. Goude ma oa aet ar maout gant Bismarck, ar bloavezh 1871, e oa savet un dra vat, memes tra, diwar ludu ar brezel kozh: ar Republik an hini eo. Ugent vloaz e oan da neuze, ha dalc'het am eus soñj mat.

Aet e oa an amzer e-biou. Toullet en doa Jañ-Mari ar Prad e erv dindan askell warezus ar Republik nevez-flamm. Goude bezañ bet mous, d'e unnek vloaz, war bourzh bag e yontr, en doa renet ar Pradig e vuhez pesketaer evel ar wazed all war ar bagoù bras. Paket gantañ e bemp bloaz hag hanter-kant, e oa aet war ar beskerezh vihan, gant ur c'hanod bihan, da deuler e rouejoù e-barzh kostez an aod, digarez dezhañ mont da c'hounit e gaoteriad malouaned bihan ha bologed, pe c'hoazh gwrac'hed, pa veze an amzer brav a-walc'h. Morse ne oa bet kaset ar Pradig d'ar brezel. Dre-se ivez e oa diaes dezhañ kompren, ha petra bennak ma oa chomet ar Republik en he sav, abalamour da betra e oa kouezhet falc'h an Ankoù war chouk

ar vro en-dro, d'ar bloavezh 1914, ha kaset e vibien, pevar anezho, d'ar brezel. Ha pegeit e padfe? Ne oa den evit gouzout, pe evit en diouganañ.

Ne oa ket ar verc'h vihan, Naig, evit kompren doare ar brezel kennebeut, petra bennak ma wele-hi, bemdez, ne oa chomet en-dro dezhi er vro, e-touez ar wazed, nemet ar re yaouank dindan triwec'h vloaz, an dud aflijet hag ar re aet war an oad dija. Bez' e ranke ar vuhez bezañ kaset war-raok memes tra, e Lechiagad, er Gelveneg hag e parrezioù all an arvor vigoudenn. Treiñ a rae ar bed, eta, dindan renerezh ar mammoù bigoudenn. Int eo, evel er broioù all, a eveshae ouzh pep tra, dre ma oa bet diwriziennet deus an tiegezhioù ar wazed yac'h, ha kaset ar re-mañ d'an drailh, da vezañ lazhet, piv 'oar, evel chatal. Ha c'hoazh, ar chatal, bez' e teuer a-benn d'o lazhañ en un taol-krenn, met ar soudarded, int, pa vezent paket e "kammdro an Ankoù", ha gloazet dibardon, pegeit e veze ret dezho chom war o zremenvan a-barzh bezañ riñset da vat, gouzout a rit-c'hwï, tudoù?

Kazimant bemdez e veze kaoz e ti ar re Prad, e-giz en tiegezhioù all, eus freuz ha reuz ar brezel a zraste an dud hag ar vro, war harzoù Bro-Frañs, el lec'h ma oa an drailh en e washañ. Kaoz a veze ivez eus ar brezel war-vor, pe dindan-vor, renet gant bagoù-spluj an Alamaned. Ha Naig ar Prad en he zi, evel ar c'hi bihan e stern an daol, a selaoue ar re vras. Dre forzh klevout anvioù nevez, e oa deuet ar plac'hig a-benn da zerc'hel soñj deus lod anezho evel, da skouer, eus anv ar C'haizer, impalaer Bro-Alamagn: "Laou II", evel ma rae ar Pradig deus ar C'haizer-se ha ne oa ket bet, an diaoul anezhañ, seizhdaleetoc'h a-benn lakaat Bro-Veljik dindan e grabanoù, e penn-kentañ ar brezel, etre miz Eost ha miz Here 1914. Anv a oa ivez eus emgannoù spontus war glannoù ar stêr Yser ha tro-dro da gêr Dixmude, e Bro-Veljik atav, el lec'h ma oa bet lazhet gwazed eus Lechiagad hag eus ar Gelveneg bet kaset du-hont, war sikour ar Veljikaned, asambles gant skouadrennadoù fuzuilherien war-vor an Amiral Ronarc'h, genidik hemañ eus Kemper. Dre voneur c'hoazh,

war a lavare an tad-kozh, en doa gallet Joffre, jeneral bras arme Bro-Frañs, hag eñ sikouret gant soudarded Bro-Saoz, lakaat harz ouzh an Alamaned, e kampoullennoù departamant ar Marne, e miz Gwengolo 1914.

Met ne oa ken aze, koulskoude, nemet penn-kentañ an drailh. Bez' e oa ar pep skrijusañ da zont c'hoazh, e-pad pevar bloaz, gant an aezhennoù mougus, emgannoù an Artois war an uhelennoù evel hini Vimy, emgannoù Verdun tro-dro d'ar c'hreñvlec'hioù evel re Douaumont ha Vaux, emgannoù departamant ar Somme ha, war bep tachenn, soudarded an div vro tal-ha-tal, pe kuzhet evel gozed er fozelloù-brezel hag en gortoz, piv 'oar, da vezañ lazhet, devet pe douaret ez-vev.

Enkrezet ivez an dud, en tiegezhioù, dre ma oant o c'hortoz bemdez keloù eus ar soudarded. Ha gwashoc'h c'hoazh pa gouezhe an dizeur war familh-mañ-familh, pa zeue betek an ti paotr ar mortuaj, pe kannad an ti-kêr, da skeiñ war an nor a-benn kemenn d'ar vamm a familh e oa bet lazhet dezhi he gwaz, pe he mab, ha ne vefe klevet biken mui eus o doare, nemet war bolz ar re varv evit ar vro. Ral-tre ar familhoù na boueze ket war o chouk bec'h ha poan ar brezel.

Ne oa ket bet disoñjet ar re Prad gant an Ankoù. Skoet en doa e daol gant familh Tomaz ar Prad, breur henañ ar Pradig, hag a oa o chom e kreiz-kêr Lechiagad, e-kichen chapel sant Jakez. Ur mab en doa Tomaz ar Prad. Ganet ar mab-se ar bloavezh 1885, Yann-Tomaz e anv-badez. Graet en doa Yann-Tomaz e selvich gant ar Royale, ar bloavezh 1905, war bourzh ar vatimant Jurien de la Gravière. Amiral e oa bet ar Jurien-se, deus amzer Napoleon III, hag aet e oa da vrezeliñ, war aodoù Bro-Veksik, e penn arme-vor Bro-C'hall. Plantañ glaou gant ar bal e-barzh fernier ar vatimant a vrezel eo a oa bet labour Yann-Tomaz da geñver e amzer-selvich, e 1905. Pa oa bet galvet en-dro, e 1914, n'eo ket ur bal eo a oa bet lakaet etre e zaouarn, met ar fuzuilh gant he baionetez ha, staget deus e gein, fardaj ar fuzuilherien war-vor. Kaset e oa bet Yann-

Tomaz da vrezeliñ, e penn pellañ ar Mor Kreizdouarel, ouzh soudarded an Atatürk, Mustafa Kemal. Aet e oa an Durked a-du gant an Alamaned, ha sarret e oa bet ganto strizhioù-mor an Dardanelloù: Hellespontos ar C’hresianed kozh, ma rank al listri tremen drezo a-benn tizhout ar Mor-Du hag ober hent, goude-se, davit porzhioù-mor Bro-Rusi: Odesa, Sebastopol ha Yalta. Dre ma oa bet savet gant Winston Churchill, kentañ lord Amiraliezh Bro-Saoz, c’hoant lakaat digeriñ strizhioù-mor an Dardanelloù en-dro, e oa bet kaset tud du-hont d’an drailh. Met ne zeuas den ebet a-benn deus soudarded an Atatürk, daoust ma padas an arsailhoù tost da vloaz, e 1915. E miz Mae 1915, en doa Yann-Tomaz lakaet skrivañ d’e wreg ur gartenn-bost hag a rede evel-henn.

— Dalc’hit mat war ar vugale, maouez. Ma sav reuz ganto, skoit un taol skañv war o divesker gant ar gordenn voan ha, prestik goude, un taol strak war bladenn an daol. Taolit evezh deus outo, dezho da vont war an hent mat ha, deoc’h-c’hwî, da chom mestrez war an dachenn atav. Amañ, war aodoù ha tornaodoù strizhioù-mor an Dardanelloù, emaomp e-barzh an ifern. Gwasket omp gant an Durked. N’eus nemet ar re c’hloazet a c’hell en em dennañ kuit, ha c’hoazh, gant ma ve tu d’o stlejañ war an a-dreñv. Me ’soñj din ne zeuin biken d’ar gêr en-dro.

Koll a reas Yann-Tomaz ar Prad e vuhez, marv evit Bro-Frañs, d’an 13 a viz Gwengolo 1915, war glannoù ar stêr Navédé Daré, Bro-Durki, hervez a c’helled lenn war ar mortuaj a oa bet kaset d’ar familh. Lezel a rae war e lerc’h, e Breizh, un intañvez ha tri c’hrouadur: daou baotr hag ur plac’h, houmañ an hini goshañ, Maria hec’h anv-bihan, ha bet ganet-hi e 1908, bloaz a-raok he c’henitervez Naig. Tost-tre e oa an div genitervez an eil ouzh eben.

Aon he doa Naig, alies a-walc’h, na’z afe he zad gant an Ankoù ivez. E penn kentañ ar brezel, betek war-greiz ar bloavezh 1915, e teue ingal d’ar gêr keloù eus Visant ar Prad. Visantig a veze graet deus tad Naig. Ur wech memes, en doa gallet Visantig dont e koñje.

Diskennet e oa deus an treñ e ti-gar Triagad ha deuet war droad betek Lechiagad. Dalc’het he doa Naig soñj bezañ gwelet anezhañ o tegouezhout er gêr war e vantell soudard kotoñs glas, un doare kasketenn gantañ war e benn, lurennoù o wiskañ e gofoù-gar, botoù-lêr tev en e dreid hag ur vuzetenn a-istribilh deus e skoaz. Mall e oa ivez gant Visantig dont da welout e familh en-dro: e wreg Anna-Vari Bergen, Naig e blac’h henañ, Rozenn, tri bloaz yaouankoc’h, ha Koñteñ, ar bidoc’hig, ganet e miz Mae 1914. Bez’ e oa dres ar vamm o reiñ bronn da Goñteñ pa dregernas botoù-lêr tev ar soudard war dreuzoù an ti.

— Ichê! Te an ’ni eo a zo ’tont ma gwaz? a daolas Anna-Vari Bergen.

— Koñje ’zo bet roet din da zont, ma maouez. Poent-bras e oa din bezañ arruet. Daou zevezh ’zo emañ gant drailhennoù bara kras nemetken.

— Ma faourkaezh gwaz! Dre voneur e oan bet dec’h e Pendreff, ha bet am eus un tamm kig dous digant ma zad. Lazhet e oa bet an hoc’h ganto.

Ganet e oa bet Anna-Vari Bergen war ar maez. Peizant e oa he zad, Lorañs Bergen kozh. Ur gêr daou benn-kezeg a oa en e zalc’h, gant nav devezh-arat, e Pendreff: penn pellañ Treff Sant Riagad, war hent Ploeur. Pendreff-Laez e oa anv ar gêr-se. Un dra a-bouez e oa, d’ar mare-se, kaout kerentoù war ar maez e-pad ar brezel.

Skoet en doa ivez an Ankoù e daol ouzh familh mamm Naig, eus Pendreff-Laez. Pevar breur he doa Anna-Vari Bergen. E penn kentañ ar brezel, d’an 8 a viz Meurzh 1915, war an dachenn-emgann e Senlis, e oa bet lazhet ha kollet he breur koshañ, Lorañs-Mari Bergen. Pemp bloaz warn-ugent e oa ar paotr yaouank, ha labourer-douar evel e dad.

Un ugent devezh bennak e c’hellas Visantig chom er gêr. D’an devezh kentañ ma oa arruet ar soudard, ha p’he doa gallet Naig mont war barlenn he zad, goude koan e oa, e c’houlennas e verc’h gantañ.

— Lâr din 'ta Tad, n'eo ket deuet da fuzuilh ganit?

Da heul komzoù ar verc'h, ez eas ur pik e kalon ar vamm a oa o skaotañ al listri-taol, e-barzh ur sailhad dour zomm, war maen an oaled. An tad, eñ, e skedas ur mousc'hoarzh mav war e zremm hag e flouras pennad-blev gell e verc'hig en ur lavarout:

— Gouzout a rit mat, ma flac'hig, ne vez ket degaset fuzuilhoù brezel da di an dud.

— Amañ, Tad, e vez kaoz ingal deus ar brezel gant ar re vras. Klevet a ran traoù bemdez. Setu bez' e vezez, te ivez, war an dachenn a vrezel o lazhañ Prusianed, bemdez, evel ma lâr Tad-kozh ar Pradig?

Hag ur pik all da vont, donoc'h c'hoazh, e kalon ar vamm, tizh atav warni gant he labour skaotañ al listri-taol. Ur sell du a daolas Anna-Vari Bergen ouzh he flac'h. Biskoazh seurt goulennoù c'hoazh e genoù ur plac'hig! a soñje ar vamm. Mousc'hoarzhin a reas an tad en-dro, hag e lavaras, skañv ha kuñv e vouezh outañ.

— Na follit ket war ar plac'hig, Anna-Vari, hag e kendalc'has gant e gaoz evel-henn. War an talbenn brezel, ma flac'hig, me a zo ma labour mont, da heul ar glañvdiourien, war sikour an dud. Un dousennad skipailhoù, evel-se, a zo deus outomp e-barzh ar batailhon. Kaset e vezomp, a-zaouadoù, ha krivizhier ganeomp, war sikour ar re c'hloazet, a-benn dougen anezho war an adreñv en-dro. Met poent-bras eo deoc'h mont da gousket, ma flac'hig. Kerzhit bremañ da gaout ho mamm, ma tilaso-hi ho tresenn deoc'h.

Ne faote ket d'an tad, anat e oa, mont pelloc'h gant e gaoz na komz deus e vuhez a soudard dirak e blac'hig. Daoust hag er graet en defe dirak ar re vras? Aet e oa Visantig kuit deus e di en-dro, da vont war gaout e vatailhon hag al linenn dan. E dad-kaer, Lorañs Bergen eus Pendreff, eo a oa deuet, gant ar marc'h hag ar charibañ, da gerc'hat Visantig e Lechiagad a-benn e gas d'an ti-gar, e Triagad. Ha kuit ar soudard. Paseet eizh miz, ha keloù ebet deus outañ ar wech-mañ. Daoust hag e oa bet, eñ ivez, sammet gant an Ankoù? Daoust hag o doa an Alamaned lakaet o c'hrabanou warnañ hag e